

Prestig he credàñ
He vezinn he bar,
Hennes 'meus karet,
Hennes he garrinn,
Tro vezinn er bed'
Ia, tro ma vezinn.

ASKAN

Enep lec'h ne zo
Un all 'vel hennes,
Va roue vezo
Me he rouannes.

Ne c'houllan netra,
Netra c'houllan-me,
Nemet Caout un dra,
Kavet Guenole,
Atao em c'hever
Beteg ann devez,
Ma zeui ann amzer
D'am lakad er bez.

ASKAN

Eneplec'h nezo
Un all 'vel henes,
Va roue vezo
Me he rouannes.

Abœ ar c'henta
Guec'h, meuz e gueled,
Me lar did Martha,
Em beuz e kared,

Liez he pedan
En de hag e nos,
Doue war nezhan
Da skuill he vennos.

ASKAN

Eneplec'h nezo
Un all 'vel henes,
Va roue vezo
Me he rouannes.

Pa daolan ur zell,
Ur zell pa daolan,
War dud Breiz-Izell,
Nikun ne gavan,
Ne gavan ken koant
Evel Guenole,
Guenole va c'hoant
Ha va c'harante.

ASKAN

Enep lec'h nezo
Un all 'vel henes,
Va roue vezo
Me he rouannes.

VISANT COAT.



KAOURINTIN AR FOLL

Var Don : **Louizaouic ar Rouz.**

Kaourintin ar Foll,
Eo ann den a gred,
He oar kement holl
He zo war a bed,
Sonjall rha gant-han,
He oar kement tra,
He zo er bed-man,
Hag en oar netra:

ASKAN

Dilav eo he zell,
Diskempenn he vleo,
He voez zo izell
Hag eb tam ekleo

Pa c'ha d'ar pardon,
D'ar pardon pa c'ha,
Ar vombard ha zon
Vel ur brouhaha,
Neuze meur ha rum
He lavar goustad,
Sellit mad he stum
Eo hini he dad.

ASKAN

Dilav eo he zell,
Diskempenn he vleo,
He voez zo izell
Hag em tam ekleo.

Keita vô garek
E kichen ann od,
Henes dalo dek,
Ia, dek martolod,
Ha gorf ezeo krenv
Krenv ha galloudus,
Evit-han ann henv
N'enn d'eo ket rec'hus.

ASKAN

Dilav eo he zell,
Diskempenn he vleo,
He vouez zo izell
Hag eb tam ekleo.

Doc'h-tu m'en gueler
Ann oll he lavar,
Henes e brasder
N'en deus ket he bar,
N'enn deus ket un all
Vefe trec'h dezhan,
Breman nag guechall
War an douar-man.

ASKAN

Dilav eo he zell,
Diskempenn he vleo,
He ouez zo izell
Hag cb tam ekleo.

Neuz fors e pe korn
Veler anezhan,
He zeler a gorn
Doc'h-tu dihout-an,
Hag ann holl lavar.
'enes eo ann den,
 he gav ket he bar,
 bar d'eb tachen.

ASKAN

Dilav es he zell ,
Diskempenn he vleo,
He ouez zo izell
Hag eb tam ekleo.

Fors petore giz
He wisk he zillad,
Ann holl gant ho biz
E diskuell ha vad,
Hag ouspenn ann holl
Ive ha lavar,
Kaourintin ar Foll,
Zo eb kar na par.

ASKAN

Dilav eo he zell ,
Diskempenn he vleo,
He ouez zo izell
Hag eb tam ekleo.

Nan kaourintin baour
Siouas war ar bed,
Eb arc'hant nag aour.
Netra ne ver ket,
Hag ouspen da ze
Did e lavaran,
Ne ve nos, na de,
Nemet poan aman.

ASKAN

Dilav eo pa zell.
Diskempen da vleo,
Da vouez zo izell
Hag eb tam ekleo.

VISANT COAT.

AR

VAM MICHEL

VAR ANN TON : Tra, ladira

Ar vam Michel siouas he deus he c'haz collet,
Dre ar prenest he ioü piou enn deus enn cavet,

Aar e'homper Lustucru, dezhi ha respontas,
Tavit ar vam Michel, n'eo qet collet ho caz.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton, tra, ladira,
Var ann ton tra, diri, dira, tra, la, la !

Ar vam Michel dezhan ractal he deus laret,
Va c'haz n'eo qet collet, neuze peuc'h enn cavet,
Ar e'homper Lustucru enn deveus respontet,
Rohit un dra benag ha deoc'h he vo rentet.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton tra, ladira,
Var ann ton tra, diri, dira tra, la, la !

Ar vam Michel lavar desidet hon da ze,
Ma rentit d'inn va c'haz he poc'h ur poq fet-de.
Ar e'homper Lustucru, p'hini n'he c'hoantat qet,
Lavar evit ur poq ho caz azo guerzet.

Var ann ton tra, ladira, var ann ton tra, ladira,
Var ann ton, tra, diri, dira, tra, la, la !

Neuze ar vam Michel, ha antrenn enn furoll,
Beteg he di he c'ha hag enn galv. coz horoll,
C'houi he peuc'h enn laeret. he mezhi malotrenn,
Me n'ur glemmo d'ar Mear hag he poc'h canabenn.

Var ann ton, tra, ladira, var ann ton tra, ladira,
Var ann ton, tra, diri, dira, tra, la, la !

Laqet dens Gallec enn Brezonnec gant,

VISANT GOAT.